

AR PEOC'H GENERAL,

Sinet, er gêr à **Baris**, entre puissançoù bras en **Europ**,
e fin mis meurs **1856**.

Var ton : *Pebeus kêlou, ô va Doue!*

Habitantet a Vreiz-Izel, erruet é han deves
A zezire hor c'halonou, karguet à dristidiges.
Doue, deus han envou liuel, o klévet cri hor glac'har,
En deus grêd eur zell a drue eus bugale han douar.

Goude hor bea bet skoet dre vrezel ha cholera,
Brec'h nerzus ar justic' divin zo deut erfin da skuiza;
O velet kement à vammou en daêlon ha en anken,
Hor c'hrouêr en deus astennet e zorn d'he grouadurien

Brassa bonheur zo er bed man, goude labour ha yec'het
Ar Peoc'h, donêzou precius, ar peoc'h a zo demp roët;
Ar Peoc'h, merc'h propr d'har garante; ha ganet er barados,
Ar Peoc'h, seder, douç ha laouen, dindan ar fleur o repos !..

Goude bea rentet graçou d'har Brovidanç eternal
E deus diouzimp distroët goalen terrubl ar brezel,
Selaouit gant attention, me ho suppli, va breudeur,
Petra zo bet occasion deus eun hevelep bonheur,

Pa gucas ker Sebastopol dindan tolliou hon arme,
Pa rankas ar russianet recul en fonç ar C'hime,
Alexandr daou, mab Nicolas, néve bignet var an tron,
A n'eum velas goel genet en e obstination.

Mes, peurdallet gant han fierte ha dre vignonet e dad
E voa resolvet da zifen e zouarou troad eus troad;
Ar goan bras, évrusamant, a deuas d'en arrêti,
Ha d'hon ampech da vont pelloc'h var continant ar Russi.

Neuze, Impalaër an Autrich, dre ma voa dean mignon,
A glaskas an oll voyenou d'en lakat d'intent rêzon;
Disklêria ferm a ras dean penos, ma yaje irroc'h;
En divije da gombatti eun adversour a vuioch.

« Dindan peder gondition e zê red dec'h », emezau,
« Lakat eun termen d'ar brezel arrêtet dre ar goan,
« Oc'h henor, nag o kurunen, na memeus o tignite
« N'o devo netra da zouja, na da zouffr deus kementse.

« Da genta, e rankit lézel ar mor Du gant peb ini;
« D'han eil, anzae ha respecti independanç an Turki;
« D'han trede, non pas klask sevel ar fortchou zo diskaret;
« D'har bevare, gant ar Sultan lézit bro ar valaket.

« Mar gonsantit da guementse, gant ar vrassa dilijanç
« E kassin tud d'ho zeumetti da Impalaër ar Franç;
« Mar plijont dean, e kredan penos ar buissançoù all,
« Pa vo kemêret o avis, ne gaffont ket anê fall ».

Alexandr erfin a blegas da guzuliou e vignon.
Kerkent, gant hon Impalaër ha rouanes ar Zozon,
Roue Sardaign gant ar Sultan, an Autrich hac ar Russi
A zo en eum glévet da zont da Baris da gonferi

Daou vistr bras eus peb puissanç, karguet gant o nation
Da ziskuti ha da zisput var ar beder gestion,
Gant oll bouar o souverén, hac instruction mad,
Var zu Paris, da vis c'hoerver, za kommancet da dostad

Mar teujer brao d'en eum intent var ar poentchou proposet,
Evije ractal entre-se eur peoc'h general sinet.
D'ar bemp var n'uguent a c'hoerver, en kaer gapital ar Franç,
D'al lun ha d'an tol a eun heur e tigor ar gonferanç.

Kenta tra zo bet dicidet er genta reunion
E voa ne vije na kombat, nac atak en nep féçon
Entre kement arme laket da gemer er brezel peurs,
Arog an eunan ha trêgont eur ar mis so hanvet meurs.

Ma ne vije ket bet possubl n'eun glévet, a ben neuze,
E kliet, d'an néve amzer, réi bataillou adarre.
En despet d'ar c'honferançoù, ar Franç a gontinuas
Da zevel eun arme terrubl evel n'eus gulet biskoas.

Ar vinstret oll-bor vret a gonvenas entre-se
Derc'hel mad ar brassa secret var kement a bassejé
Eo o deliberation, evit nelje den abet
Nac anveout na critika langach an oll-bouaret.

Ar c'bazetennou, curius evel ar gommerezet,
Gant o c'hant mil furikêres so bet éno goal dapet;
N'o deus ket allet, bep mintin,annonci d'ho lectourien
Petra voa en deves arog er gonferançoù o ren.

D'an daou var n'ugent a vis meurs, ar Pruss e deus obtenet
Digass daou den oll-bouaret d'an assamble avancet,
Abalamour ma zê unan deus ar bemp puissanç vrassa
Eus han Europ, ha deus pere e zê ar Franç ar guenta.

Evit ampech ne divije digare da lavaret
Penos ne alje ket heulia konditionou laket
Eb e farticipation, hac eb prizout e gervel;
Se a vije bet avoallac'h evit diskleria brezel.

Doue! gant pebeus nec'hamant, gant peger bras kalonat
E velemp an de divêa deus a vis meurs o tostat!
En eur zevel hon daoulagat bemde var zu an envou
E kassemp d'an oll-galloudec hor ferventa pedennou.

D'han drégont, demeus a vis meurs, da eun heur goude kreis de,
Ar vinistret oll-bouaret, gant kals a solannite
O deus keméret eur bluen, hac o sinatur laket
E traou ar bajen kurius deus an fraite o deus gréd.

Hon Impalaères yaouank e deveus ive c'hoantét
Miret ar bluen gant piui ezé bet ar peoc'h sinet;
Arog e lakat en implij e zeus laket en dro dèi
Kement a ell represanti ar peoc'h santel o tristréi.

Ar pevarzec oll-bouaret so bet, gant distinction
Recevet, tri c'hard heur goude en palæs Napoleon
Eus an daou ministr o deveus bro ar Franç repretantet,
Eunan a zo gréd senatour, eguile kroas-vras hanvet

Han deves memes ker bnan, evel ma kers al luc'het,
Han telegraphou o deveus ar c'hélou bras annoncet;
Har c'hléyer, an tabourinou, ar c'hanolliou klouar c'hoas
O deus saludet ar peoc'h gant o moues skeltus ha braz.

D'ar zul da nos, han oll ties er c'herriou a Vrèis-Izel
A voa illuminet beteg an estach muia huel;
Ar vugale, dre ar ruyou, gant o moues pur ha ken gai,
Var muzur ha ton ar rappel a grie demp VIV' LA PAIX!...

Ar Franç, a drugare Doue, dre an fraite a zo gréd
E deus prouvet d'an oll e zè nopla puissanç so er bed;
E frudañç, e otorite, hac e moderation
A laka e c'honsideri vel ar genta nation.

Deut, ô mammon carantezus, c'hui pere zo o vouela
D'ho pugale ges partiet pa zonc'c'h an neubenta,
Deut da glévet e zint erru da gonsoli oc'h anken
Souden e velfet aneze azeet en o kichen.

Propriété.

Me vel eur vanden zoudardet oc'h antren en Breiz-Ize
Laouen evel ar pinsinet, ha skan evel an avel,
O boutou zo leun a bouldren, hac ar c'hoëzen var o zal
Eur vialen ven en o dorn, ha c'hoant déze da zançal

Consolation o kosni, oc'h esperanç ar vrassa,
Ar re pere a c'hortoac'h da rêi déc'h eun tam bara
Ar mab se pini a c'halyac'h da serri o taoulagad
A deu varzu e gabanen da glask e vam hac e dad.

Hac ar vortoloded vaillant pere a voa er brezel
Dre o c'houraj en danjeriou oc'h henori Breiz-Izel
Ar vortoloded ker joäus ne réfont nemert eul lam
Evit kua, gant plijadur entre diou divrac'h o mam

Grid fest, en eum rejouissit, rac an deves a hirie
A zo particulieramant gréd evidoc'h gant Doue,
Mammon tener, rentit graçou evit o pugale baour,
Guelet a rafoc'h aneze aben pardon guir zicour

Mæs c'hui tad ha mam glac'haret, piou a ello dont a bet
D'ho lakat d'en eum gonsoli eus a varo o mibien?
E pad ma vo ar vammou all leun a laouenidignes
O calon a vouelo c'hoëro, mantret gant trididignes!...

Henvel eus Rachel gueach-all ne fello d'éc'h caout in
Da rêi déc'h baum an esperanç da skuilla var o koul
Pa vo ar vammou all c'hoarzus ha cherisset en pep gis
C'hui a c'hlebio gant o taélou ar pave deus an Ilis.

Yec'hed, chanç ha prosperite da zoudardet Breiz-Ize
Pere o deus bet ar bonheur da achap deus ar brezel
Ra blijo gant mæstr an envou receo en e varados
Ar re ané o deus kavet en dachen-henor repos.

PIERRE DERRIEN,

Eus a gêr Montroules.

